

420/1

9 a viz Here 1929.

SON EURED-AOUR AOTROU HAG ITROUN AR GERNEVEZ HAG EURED-ARC'HANT AN AOTROU HAG AN ITROUN HERVE

VAR DÔN: *Ar boutaouer koad.*

DISKAN

Kanomp, kanomp eur ganaouen
Tranlardireno,
Da laouennât eun tamm hor penn
Tranlardira lan la tranlardireno

1

Eured arc'hant hag eured-aour
Hep kanaouen n'o deus tamm saour!

2

Kanomp eta ma zaï d'an traon
Ar friko zo bet ouz hor staon;

3

Ma teui an teodou da zouplât
Gant ar gwin koz hag ar chist mat;

4

Ma zaï ar marvailhou en dro
Gant ar c'hafe hag an « tako ».

5

Aotrou, itroun ar Gernevez,
Henor, henor d'ho tiegez!

6

Padet en deuz anterkant vloaz;
Ra bado keit ha keit all c'hoaz!

7

C'houi ho peuz grêt e kant parrez
Kement a vad gant ho tanvez!

8

C'houi o peuz grêt euz a Gastel
Kenta parrez a Vreiz-Izel!

9

C'houi a zo bet ho taou ouspen
Ker mat evit ho merourien;

10

Ker mat d'ober aluzennou
Ha da bellât ar c'hlenvejou!

11

Ma vije grêt dioc'h tud Kastel
C'houi pije difen da vervel!

12

Pa deufe varnoc'h an Ankou
Ni dorfe dezhan e gostou;

13

A daoliou dourn, a daoliou mein
Ni dorfe dezhan e velkein;

14

Krouget e vije a ispill
Ouz eur vezen gant Per ar C'hrih.

16

Aotrou, ar groaz var ho pruched
A dra zûr n'eo ket bet laeret!

15

Chomit ho taou leun a yec'hed
Da beurechui ho kantved

17

Dre c'hras Doue gant ho mibien
N'eo bet morse trec'het ar vouên.

18

Aotrou Hervé, e bro Leon
C'houi peus gounezet peb kalon.

19

O sevel deomp syndikajou
Hep sellet ouz an dispign.

20

O vont o tont 'vel an avel
Digor ho tourn hag ho kodel.

21

Hag o pleustri var gement tra
Da wellât hon doare-beva.

22

Hag emaoe'h brudet dizale
Koulz e Treger hag e Kerne.

23

Brude eo ive ho pried
Ken drant ha ken laouen bepred.

24

Diia pemp bloaz varn'ugent 'zo
M'ho peus en digaset er vro.

25

An holl a lavar: dre ar bed
Gwelloc'h n'ho pije ket kavet!

26

Ra blijo eta gant Doue
Ho miret gant ho pugale.

27

Ho miret pell-pell amzer c'hoaz
Beteg hag goude o kant vloaz.